

# Fiñv da Skolaj

Skolaj Diwan Jakez Riou / n° 7 / Kerzu 2018

## KELEIER AR C'HUZUL-MERAÑ / LES NEWS DU KUZUL-MERAÑ

**HUNVA : EUS PLOGASTEL DA ENEZ TUDI** Dav vo d'ar skolaj kuitaat hunva Plogastel-sant-Jermen e fin ar bloavezh skol. Ar gevredigezh l'Atelier CEAPC a oa o klask ul lec'h hag a c'hellfe bezañ implijet a-hed ar bloaz hag e-pad ar vakañsoù ivez ha divizet zo bet degemer anezho gant ti-kêr Plogastel. E Enez Tudi e vo staliet hunva ar skolaj adalek miz Gwengolo 2019, e-lech ma oa staliet l'Atelier a-raok. Ar gevredigezh Berry Tudi a ra war-dro ar savadur-se (kampoù vakañsoù 'vez aozet eno). Kozh-walc'h eo ul lodenn eus ar savadur met nevesaet eo bet al lodenn all, ha cheñchet ar gaoer n'eus ket pell. Plas a-walc'h e vo evit degemer an holl. Tu kreñv ar greizenn : tal ar mor emañ !

**EMVOD-MEUR 13 A VIZ HERE** Kinniget eo bet bilañs ar bloavezh paseet gant Olivier Méreaux, en un aerglec'h joaius. Da zerc'hel soñj : yac'h eo kontouriez ar skolaj (arc'hant zo bet lakaet a-gostez o soñjal el labourioù da zont) ha mont a ra war-raok ar raktres hunva nevez e plas EHPAD ar Brug e Penharz. Paeet e vo ur studiadenn deknik gant ar c'huzul-departamant ha kêr Gemper (koust : 10 000€ well-wazh). Dizale e krogo ar studiadenn. Gwall sikourus eo Solange Creignou hag Erell Coupier en Departamant. Jean-Pierre Doucen, dilennad e-karg eus ar skolioù hag eus ar brezhoneg, a heuilh an teuliad evit kêr Gemper.

**INTERNAT : DE PLOGASTEL À L'ÎLE TUDI** L'internat du collège devra déménager en fin d'année scolaire. L'association l'Atelier CEAPC était à la recherche d'un centre d'accueil disponible pendant l'année scolaire et pendant les vacances et la mairie de Plogastel-saint-Germain a décidé de les accueillir. Du coup, le collège va récupérer le centre d'accueil où était hébergé l'Atelier auparavant, à l'Île Tudi, à partir de septembre 2019. C'est l'association Berry Tudi (organisatrice de séjours de vacances) qui gère ce lieu. Une partie du bâtiment est ancienne mais une autre a été rénovée et la chaudière a été changée il y a peu. Il y a de la place pour tous. Gros point positif du centre : la vue sur mer !

**ASSEMBLÉE GÉNÉRALE DU 13 OCTOBRE** Olivier Méreaux a présenté le bilan de l'année écoulée dans une ambiance détendue. A retenir : la comptabilité est saine (une provision a été faite en vue de futurs travaux) et le dossier du futur nouvel internat (à la place de l'EHPAD des Bruyères à Penhars) avance peu à peu. Le Conseil départemental et la Ville de Quimper vont financer une étude de faisabilité (coût approximatif : 10 000€) qui devrait commencer sous peu. Solange Creignou et Erell Coupier, au Département, sont des soutiens précieux. Jean-Pierre Doucen, élu en charge des écoles et du breton, suit le dossier pour la Ville de Quimper.



# KELEIER AR C'HUZUL-SKOAZELL LES NEWS DU KUZUL-SKOAZELL

**DISTRO AR C'HUZUL-SKOAZELL** N'eo ket chomet ar c'huzul-skoazell o straniñ en trimiziad kentañ : gwerzh onion, gwin, chokolad, gwez Nedeleg, deiziadurioù... Un donennad onion zo bet gwerzhet er bloaz-mañ pezh a dalv 1500€ gounid ! 15 000€ zo bet roet d'ar gevredigezh Skolaj Diwan Jakez Riou gant ar c'huzul-skoazell e 2017. Gourc'hemennou !

Festoù ha souezhadennoù zo war ar stern evit an daou drimiziad o tont. Ezhomm zo tud ouzhpenn evit kreñvaat skipailh ar c'huzul-skoazell. Kontakt : skoazell.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh



**LA RENTRÉE DU KUZUL-SKOAZELL** Le kuzul-skoazell n'est pas resté les bras croisés au cours de ce premier trimestre : vente d'oignons, de vin, de chocolat, de sapins, de calendriers... Une tonne d'oignons de Roscoff a été écoulée, soit 1500€ de bénéfice ! En tout, 15 000€ ont été donnés à l'association Skolaj Diwan Jakez Riou par le kuzul-skoazell en 2017. Bravo !

Des fêtes et des surprises sont en préparation pour les deux trimestres à venir. Il y a besoin de parents volontaires pour renforcer l'équipe du kuzul-skoazell. Contact : skoazell.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh

## SKOLAJ MOD IMPLIJ COLLÈGE MODE D'EMPLOI

**1 SKOLAJ, 2 GEVREDIGEZH** Div gevredigezh, kaset gant tud skolajidi, a labour bemdez evit reiñ kondisionoù skoliata brav d'hor bugale :

☞ ar gevredigezh « Skolaj Diwan Jakez Riou » : renet gant ur c'huzul-merañ, un 10 den bennak ennañ, CA e anv boaz. Merañ a ra al lojeiz, an darempredoù gant ar gevellerien, ar c'hopridi, an hunva, ar c'hantin, an dafar... Olivier Méreaux eo ar prezidant anezhi, Cécile Fédieux ar sekretourez ha Mick Loeffel an teñzorour.

☞ ar gevredigezh « Kuzul-skoazell Skolaj Diwan Jakez Riou » : renet gant ur c'huzul-merañ ivez, met digor d'an holl eo emvodoù ar c'huzul-skoazell. Dastum arc'hant evit arc'hantañ ar gevredigezh « Skolaj Diwan Jakez Riou » eo he fal. Claire Louet eo ar brezidantez anezhi, Lenaig Abiven ha Gildas Bitout ar sekretourien ha Cécile Coue an deñzorourez.

À retenir : Kuzul-skoazell veut dire comité de soutien, et CA se dit kuzul-merañ en breton.

**1 COLLÈGE, 2 ASSOCIATIONS** Deux associations, composées de parents de collégiens, œuvrent au quotidien pour que la scolarité au collège Diwan Jakez Riou se passe dans les meilleures conditions matérielles possibles :

☞ l'association « Skolaj Diwan Jakez Riou » : dirigée par un conseil d'administration d'une dizaine de membres (appelé couramment CA), elle gère les locaux, les relations avec les partenaires, les salariés, l'internat et la cantine, le matériel... Olivier Méreaux en est le président, Cécile Fédieux la secrétaire et Mick Loeffel le trésorier.

☞ l'association « Kuzul-skoazell Skolaj Diwan Jakez Riou » : également dirigée par un CA, mais de fait, toutes les réunions sont ouvertes à tous. Elle a comme mission de récolter des fonds pour aider au financement de l'association « Skolaj Diwan Jakez Riou ». Claire Louet en est la présidente, Lenaig Abiven et Gildas Bitout les secrétaires et Cécile Coue la trésorière.

## BUHEZ AR SKOLAJ VIE DU COLLÈGE

**KROASHENT AR MICHERIOÙ** Bep bloaz e vez aozet gant Diwan un hanter-devezh gouestlet d'ar micherioù. Pedet eo holl Dredeidi ar rouedad da zont da gejañ gant un hanter-kant brezhoneger bennak, o labourat war a bep seurt tachenn, kontant da reiñ un tamm amzer evit komz eus o micher gant ar skolajidi. D'al Lun 11 a viz Meurzh e vo Kroashent ar micherioù er bloaz-mañ, e Karaez. Emañ Diwan o klask tud evit kinnig o micher c'hoazh. Kontakt : eil.derez@diwan.bzh. Digoll ebet met posupl eo kaout un testeni evit an tailhoù.



**CARREFOUR DES MÉTIERS** Chaque année, Diwan organise Kroashent ar micherioù pour permettre à tous les Troisièmes du réseau de découvrir tout un panel de métiers. Une cinquantaine de professionnels bretonnants de tous les secteurs d'activité, prêts à donner un peu de leur temps, viennent parler de leur métier avec les jeunes, constitués en petits groupes. La prochaine édition aura lieu à Carhaix le lundi 11 mars. Diwan cherche encore des professionnels pour étoffer la liste des intervenants : eil.derez@diwan.bzh. Pas de défraiement des intervenants mais attestation pour déduction d'impôts à la demande.

**KANAOUENNOÙ** E-ser e gentelioù kan e laka Dominig Jolived-Klec'h pep klasad da sevel ur ganaouenn war un ton anavezet. Unan zo prest dija, savet gant ar 6<sup>ed</sup> Melen, «Brezhoneg bemdez» war ton John Kanak. Setu ar poz kentañ hag an diskan :

*Bemdez 'z eomp da Skolaj Diwan  
Brezhoneg 'vez ganeomp bemdez  
Hag a-wezhioù e vez chikan  
Brezhoneg 'vez ganeomp bemdez*

**CHANSONS** Pendant les cours de chant, Dominig Jolived-Klec'h accompagne chacune de ses classes dans l'écriture d'une chanson sur un air connu. Les 6<sup>e</sup> Melen ont écrit «Brezhoneg bemdez» sur l'air de John Kanak. Voici la première strophe et le refrain :

## BEVAÑ E BREZHONEG VIVRE EN BRETON

**BAK E BREZHONEG** E 2016, 2017 ha 2018 o doa goulennet liseidi eus Lise Diwan Karaez an aotre da dremen an amrouenn matematik e brezhoneg da-geñver ar bak. Nac'het e oa bet gant ar Rektordi. 15 skoliad eus al Lise Diwan o doa divizet sevel o c'hopiennoù e brezhoneg memestra e miz Even 2018. Reizhet e oa bet an traoù e galleg. Nebeud amzer goude-se e oa bet savet ar gevredigezh Bak e brezhoneg evit kenderc'hel gant ar stourm. Ar re yaouank a c'houlenn daou dra : adaptout o c'hopiennoù ha kaout un dreist-aotre da sevel ar c'hopiennoù matematik e brezhoneg en dazont, e-giz ma'z eo bet roet d'an Euskariz. Aziliz Boistuaud hag Ismael Morvan zo e penn ar gevredigezh, sikouret int gant an alvokad David Rajjou.

**BAK E BREZHONEG** En 2016, 2017 et 2018, des lycéens de Diwan avaient demandé l'autorisation de passer l'épreuve de maths du baccalauréat en breton. Refus du Rectorat. 15 lycéens de Carhaix ont alors pris la décision de braver l'interdit et de rédiger leur copie en breton, pour faire avancer le débat. Fin de non recevoir : seules les parties chiffrées compréhensibles par un enseignant non bretonnant avaient été corrigées. Peu après est née l'association Bak e brezhoneg pour poursuivre le combat. Les jeunes ont deux revendications : récupérer leurs copies et obtenir une dérogation pour pouvoir passer le bac de maths dans la langue de leurs études en 2019, comme le font déjà les lycéens basques. Aziliz Boistuaud et Ismael Morvan sont à la tête de l'association et sont soutenus par l'avocat David Rajjou.

Deoc'h da c'hoût, 11 skolajiad eus Skolaj Diwan Kemper o doa divizet sevel o c'hopiennoù Skiantoù e brezhoneg evit ar Brevet, e miz Even tremenet. Is-notennet int bet abalamour da se (11/50 keidenn padal e oa 30/50 ar geidenn evit ar re o doa respontet d'ar goulennoù e galleg). Dizale e vo reizhet o c'hopiennoù en-dro.

Pour info, 11 collégiens du Skolaj Diwan Kemper, avaient décidé en juin dernier de rédiger leur épreuve de SVT / Technologie du brevet en breton. Leurs copies semblent avoir été sous-notées (moyenne de 11/50 pour les copies en breton et de 30/50 pour les copies en français). Elles seront prochainement recorrigées.

# BERR-HA-BERR BRÈVES

**RGPD** (Reoliadur hollek war gwareziñ ar roadennoù) : Komprenet en deus rouedad Diwan e oa pouezus plediñ gant an RGPD. Emañ ar skolaj o heuliañ alioù ar Stad evit doujañ ouzh al lezenn nevez : kizidikaat ar gelennerien, ar skolajidi hag ar gerent war gwareziñ ar roadennoù personel. Ha c'hwi ? Goût a rit eus petra zo kaoz ? Ur c'hwiz zo war Internet evit gouzout muioc'h... <https://frama.link/cnil-rgpd>

**RGPD** (Règlement général sur la protection des données) : Le réseau Diwan a pris conscience des enjeux. Le skolaj, en particulier, est dans une démarche de mise en conformité : sensibiliser les enseignants, les élèves et les parents sur la protection des données personnelles. Êtes-vous au point ? Pour le savoir, un petit quiz accessible aux collégiens et aux parents est en ligne. <https://frama.link/cnil-rgpd>

Hag anveout a rit ar c'hoñkour **SINEMA CHAKOD** ? Ur genstrivadeg filmoù berr bet filmet gant kameraioù bihan eo. Aozer ar c'hoñkour, Emglev Bro Douarnenez, en deus gouennet gant ar 6<sup>veidi</sup> kinnig temoù. « Pemp troad d'ar maout » zo bet choazet da heul ur votadeg foran. An holl a c'hell kas filmoù betek an 12 a viz Ebrel 2019. An daou glasad 6<sup>veidi</sup> a savo filmoù da-geñver ar c'hentelioù brezhonek.

Le concours **SINEMA CHAKOD** vous connaissez ? C'est un concours de courts-métrages en breton réalisés avec des caméras de format poche. L'association organisatrice, Emglev Bro Douarnenez a demandé aux 6<sup>e</sup> du skolaj de proposer des thèmes. Suite à un vote public, le thème retenu est : « Pemp troad d'ar maout » (chercher midi à 14h). Tout le monde peut envoyer des films jusqu'au 12 avril 2019. Les 2 classes de 6<sup>e</sup> travailleront à la réalisation de film dans le cadre des cours de breton.

**HELP ! MON ENFANT PARLE BRETON**, kit pour parents de petits bilingues : Sed aze titl ul levr embannet nevez zo ha fardet gant Katell Leon ha Maud Auvrignonet. An distro-skol, ar babigoù, ar grennarded, frealziñ, an dilhad, ar boued, Halloween, ar bubuoù... e kement rann e vo kavet boued ganeoc'h evit ambrugañ ho pugale war hent an deskiñ brezhoneg.

**HELP ! MON ENFANT PARLE BRETON**, kit pour parents de petits bilingues : C'est le titre d'un livre sorti il y a peu imaginé par Katell Leon et Maud Auvrignonet. À travers des chapitres tels que la rentrée, le coin des bébés, le coin des ados, rassurer, la météo, les vêtements, la nourriture, Halloween, les petits bobos etc., ce livre est conçu pour aider les parents à accompagner l'apprentissage du breton par leurs enfants.

**NEDELEG LAOVEN** d'an holl. Bloavezh mat, yec'hed, bara er forn ha karantez leiz an dorn !

**BON NOËL** à tous. Bonne année, santé, du pain au four et de l'amour plein les mains !

# DEIZIATAER AGENDA

- 31/12/18 Fest-noz Kalanna aozet gant Diwan Kemper
- 21-25/01/19 Staj micher an Tredeizi
- 02/02/19 Dorioù digor er skolaj
- 11/03/19 Kroashent ar micherioù e Karaez

- 31/12/18 Fest-noz Kalanna organisé par Diwan Kemper
- 21-25/01/19 Stage en milieu professionnel des 3<sup>e</sup>
- 02/02/19 Portes ouvertes au collège
- 11/03/19 Carrefour des métiers à Carhaix